

**Yannic Kokard, autre version.**

Mar get dar pardonn me a iel ie  
 Da c'houlen ar c'hrass digant Doue  
 Ma heiomp on Daou en eur goële

ma heiomp on daou en eur goëlead  
 a dibi deus ar memeus skudelad

— Jannik Kokard ko(r)teït eun tam  
 ma hin en ti da kaout va mam

Da houd ag hi a n'deus pe a dra  
 Da reï dem on daou da leïna

— Jannik Kokard a meus goëlet  
 Va mam petra a leveret  
 Klevet e meus e demeet.

— nag it tu gantan da leïnan  
 ag interrojet anean

Deus ar chomzo a teuï deus e ben  
 Roit tu dean e c'hroas nouen  
 eun archet a pevar flanken

— iannik kokard dime leret  
 klevet e meus e oc'h demeet

— me zo demeet a dra sur  
 non pas dam grad a plijadur.

iannik kokard va c'harante  
 ansavet ouin ar virione  
 a c'houi c'heus greg a bugale.

— me a meus greg a bugale  
 a garre bea er ger gante(1)  
 Setu aze ar wirione

— iannik kokard va harante  
 eved eur banac'h digan-ne.

ne roïn ked deoc'h deus va gwin guen  
gant aont ne saffe en ho pen

me roïo deoc'h deus va gwin kleret  
A balamour mo heus pel da vonet.

Jannik kokart ne voïe ket e voa klan(v)our  
kent a voa goëlet e skeud en dour,  
Dispenet oll gant al laour.

ho heva gwin a non pas dour  
Digant eur c'hakouvez treïtour

ho heva gwin deus eur veren  
Digant eur plac'h ag a garien.

Pa sevet din va zi neve  
Sevet-han huel er mene

grid eur prenest en e pignon  
vid ma velin ar procession

ma vellin procession plouillo  
vond dar sul da Sant Kado.

hag a velin ar kroas archant alaouret  
meur a vech e meus-hi douget.

Kri vije ar galon na voëlche  
en ti ar c'hokard goz neb a vije

simplet e dad simplet e vam  
o wellet kas inannik kokard de ti lan.

e dad ag e vam a voa simplet  
a kalon he bried a voa rannet.

Marie Clec'h, de Lanmeur, 17 fév. 1851.

*sur le recto du fol. 201, de l'écriture de Halléguen, seulement le titre :  
Yannic Kokard, autre version.*

(1) ce 2ème vers de la str. a été ajouté dans l'interligne (entre le 1er et le 3ème)